

(339, suite)

Ar Peoc'h.

Var ton: Debonjour Fantic Cocant.

(340) Debonjour, Prinç Bourbon!
 Emàn ar cheuchamant!
 Dre fêt Louis - Anton (1),
 Echa an nec'hamant.
 Clèvit an trompillou,
 Clèvit ar musicou;
 Merc'hed, neus gen a drous,
 Eus peb amourous.

Er Spagn coulz hac en Franç,
 Diaoul an droug-ober,
 Gant calz a arrogant
 A glasq' ouzomp affer.
 Clèvit an trompillou, &c.

Erit caret peoc'h mad,
 Eur peoc'h hir ha padus,
 Louis a laq var droad
 E arme gloriüs.
 Clèvit an trompillou, &c.

Soudarded Franç, gant joo,
 Dindan an drapo güen,
 A gri Vive le Roi!
 Hac a quertz d'an dachen.
 Clèvit an trompillou, &c.

Tremen ar Bidassoa,
 Ha calz a gueriou all;

(341) Qemer fortchou a voa,
 Hac ar guer capital.
 Clèvit an trompillou, &c.

Peurfin an armeou
 Eus hon enemiet
 Nemet c'hoariellou
 Ne voant d'hor zoudardet.
 Clèvit an trompillou, &c.

Peb soudard ancien
 A gri a galon
 Ne voa bet cabiten
 Coulz hac ar Prinç Bourbon.
 Clèvit an trompillou, &c.

Vaillant ha generus,
 Ar Prinç a zo hardi;
 Dreizàn omp gloriüs
 Pa yër da gombatti.
 Clèvit an trompillou, &c.

Viv an Duc d'Angoulèm!
 A lavar peb soudard;
 Emàn a strinc ar flem
 Evel ma rê Bayard.
 Clèvit an trompillou, &c.

En peur-fin ar gombat

(1). - An Duc d'Angoulèm.

294

Eur c'hassedat mindraill
 En e guichen, a blat,
 A zifoeld hac a zraill. (342)
 Clêvit an trompillou, &c.

Eur general a gri :
 « Prunç ! ma vijec'h tostoc'h !!!... »
 En respont, dizourci ;
 « Soudez e vo ar peoc'h ... »
 Clêvit an trompillou, &c.

« Me a vije bet eñ,
 (Ene an Duc d'Angoulem ;
 » En coulz compaignerez
 » Me a varvje diglem... »
 Clêvit an trompillou, &c.

D'ar pavillon a Franç
 Ini Spagn] unisset,
 Dre urz ar Brovidanç
 Dre oll a zo plantet.
 Clêvit an trompillou, &c.

Dindan urz eur Bourbon
 Brezel na bad get fell ;
 Ar revolution
 A ya gant an avel.
 Clêvit an trompillou, &c.

Ferdinand delivret,
 Echu eo ar brezel ;
 Viv an oll Bourbonnet !!! (343)
 Tud fall, c'houi ranc tevel.
 Clêvit an trompillou, &c.

Viv an armeou Franç
 Hac hor Gouarnamant !
 Dreizo, en assuranc,
 Vo fin d'an dud mechant.
 Clêvit an trompillou, &c.

Na vezo nemet peoc'h,
 Joa ha prosperite :
 Ni a vo eirussoc'h
 Dre fuzhez hon Roue.
 Clêvit an trompillou, &c.

Buguel ar Brovidanç,
 An Duc eus a Vourdel
 Vo goarantiach Franç
 En peoc'h hac en brezel.
 Clêvit an trompillou,
 Clêvit ar musicou ;
 Merc'hed, neus gen a drouz,
 Eru pel amourous.

Composet gant an Authou Le Coat,
 commisser poliç en Montroulez.
 30 eus a vis Here 1823.

(Vol. VII, p. 339-343.)
 strophes non numérotées.